


bremañ



Reuz e Breizh

**Kendiviz e
Gwengamp**
gant Stourm ar Brezhoneg



Trugarekaadoù bras a gasomp d'hon mignoned o deus skoazellet Bremañ ar bloaz-mañ, a-drugarez dezho ivez eo ma c'hellomp kenderc'hel war hent ar gwellaat hag ar bravaat. Koll a ra Bremañ arch'ant bras gant ar frejoù moulañ bepred, ha m'hon eus c'hoant tizhout hor palioù (kaout mil koumananter ha dont er-maez bep pemzektez e 1993), hon bo ezhomm eus ho skoazell c'hoazh : koumanantit, adkoumanantit, brudid ar gelaouenn tro-dro deoc'h !

Mil bennozh deoc'h.

Dominig KERVEGANT 50 lur, Gwillerm HUBERT 50, Denise THEPAUT 50, Andrew LINCOLN 20, Pascal TABUTEAU 70, Chantal LIBOUBAN 20, Loïg FRABOULET 20, Denez MAGER 20, Yann Yves LE GUERN 20, Paol KEINERG 70, Gilbert KEROUANTON 70, Joel DENIEL 70, Erwan VALLERIE 320, Jean François BARON 20, Pierre LE SAUX 20, Gwenael EMELYANOFF 50, Iwan KADORED 20, Bernez AR MOULLEG 120, Yvon BORDIEC 70, Mikael KONK 20, Bernez TANGI 70, Robert PERROUD 70, Jean Louis BOT 20, J.I. PRESS 50, Mary MONIQUE 20, Paol AR MEUR 50, Marcel DROUAL 70, Ivona MARTIN 20, Jakez KERJEAN 20, Yves REZEAU 20, Kristen TONELLE 20, Jean-Louis BUSSON 70, Glaoda MILLOUR 20, Gilbert BITSCH 170, Mikael BERTIN 20, Alexis KONDRATIEV 18, Pascal AR MARC'HEG 45, Laurent GUILLAUMIE 20, Yann Erwan ALLAIN 50, Thierry MADEC 20, Robert RANNOU 50, Gerard BAILLOUD 70, Michel TREGER 70, Herve BIHAN 20, Benead LUQUIAU 20, Yannig AODRAN 70, Fañch KERRAIN 20, Christophe NICOL 50, Jean Yves LE GOFF 70, Yves CAROFF 20, Roland MOGN 70, Jean MOULLEG 40, Yves GUILLOU 120, Viviane AUFFRET 50, Philippe CADIOU 20, Brieg AR MENN 120, Daniel KERNALEGUEN 70, Christian

BRISSON 70, Henri ANCELOT 20, Vincent COATTEREL 20, Gaetan BOULIC 20, Eric TYMEN 20, Yvon ABIVEN 50, Daniel AR GEVEL 70, Gwenole GEVEL 20, Yann Lug JAKOB 20, Loïg ORHAN 50, Loëz CLEAC'H 50, Bernez AODIG 20, Christian LE GOFF 20, Reun TREGER 20, Herve SEBIL KERNAODOUR 20, Alan HERVE 20, Loik CHAPEL 50, Yves TYMEN 50, François JESTIN 220, Per AN DIGERC'HER 20, Rene LE HIR 20, Mark GUILLOU 20, Yann Ber SALAUN 70, Lukian RAOUL 20, Yves DAREAU 20, Patrice COIC 70, Per-Vari KERLOC'H 20, Guy THOUMELIN 20, Jacques MEREL 70, Mikael DELIGNE 70, Pierre POULIQUEUR 70, Yann-Ber MONTREER 20, Benjamin PITRE LABUSET 50, Ronan BLANC 20, Nolwenn LOUARN 20, Roger LE DU 20, Gilbert GEOFFROY 20, Jean-Michel MAHE 20, Evelyne LOZACH 20, Romuald TEXIER 20, Roparz CARRE 120, Fulup AR SOLLIEC 70, Amzer Nevez 70, Jean-Paul KELVENNEG 70, François-Régis ROLLAND 50, Yvon CHALMEL GICQUEL 20, Gireg KONAN 70, Sylvain BOTREL 20, Andre LAVANANT 120, Claude LANCHEG 20, Joseph LEC'HVIEN 20, Joseph CHARDRONNET 36.

En holl : 4699 lur.

Da heul hor galv eo bet degemeret gant Bremañ 12 koumanant nevez er miz-mañ. Gant ma gendalc'ho e-gize, ha kalz gwelloc'h c'hoazh, ha ma tevio Bretoned niverusoc'h-niverusañ d'ober anaoudegezh gant hor gelaouenn !

Skipailh BREMAÑ

Laouen on da vezañ reseed du-mañ ur skouerenn eus ar gelaouenn "Bremañ". Ur pal a-bouez evit dazont hor yezh eo hoc'h hini. Prest on neuze da goumanantit ha kavout a reot e-kichen al lizher-mañ ur chekenn a nav-ugent lur evit reseed ar gelaouenn.

Kalon vat deoc'h.

Claude le Breton

Trakt skignet e Prefeti Roazhon Nac'h a ra Bro C'hall sinañ "Karta yezhoù bihanniver kuzul Europa"

Abalamour da betra ? Difennet eo ober gant ar brezhoneg e-barzh melestradurezh ar Stad C'hall.

Ur skouer :

Mar nac'hit paeañ ho tailhoù, oc'h arguzenniñ e ranker doujañ Feulme emglev 1532 a stagas Breizh ouz Bro-C'hall, petra a c'hoarvez ganeoc'h ?

1) Lakaet e viot da istrogl.

2) Kondaonet e viot da baeañ.

Mar klaskit komz brezhoneg dirak e lez a varno ac'hanoc'h, e vo nac'het ar gwir-se ouzhoc'h, en anv Skrid Villers-Cotterets a lakae berz e 1539 war ober gant yezhoù all estreget ar gaileg hag a zo an harp pennañ evit ar gouarnamant da nac'h sinañ ar Garta-se.

Lu eo sorc'hennou ar gouarnamant gall, hogen mervel a ra ar brezhoneg un tamm muioc'h bemdez o vezañ berzet er vuhez foran.

En ur plantañ reuz er velestradurezh c'hall e Breizh e respontomp.

Ha betek kaout hor c'hoant e talc'himp gant oberoù e-giz-se.

25.XI.92

Stourm ar Brezhoneg Bro Roazhon

Karta yezhoù bihanniver Kuzul Europa Prefeti rannvro Breizh aloubet



D'ar Merc'her 25 a viz Du e oa bet aloubet burevioù zo e Prefeti Rannvro Breizh e Roazhon gant un hanter-kant bennaket a dud yaouank, izili eus Dazont ha Stourm ar Brezhoneg ha studierien Kevrenn Geltiek Skol-Veur Breizh-Uhel.

Deuet e oant eus Brest, Naoned ha Roazhon evit plantañ reuz e burevioù ar Prefeti, ha goulen un emgav gant Prefed ar Rannvro a-zivout (nann) sinadur Karta Europat ar Yezhoù gant Bro-C'hall. Prim e oa tremenet an traoù. En eil solieradur e oa bet aloubet holl burevioù ar Rannvro. Studierien all a oa en em chadennet ouzh peulioù kreiz ar sal-degemer, e traoñ ar savadur. A-benn ar fin e voe degemeret pemp dileunad e burev ar Prefed. Erruet e oa e-keit-se un nebeud poliserien ha skinwel bro

Roazhon (Télé-Rennes) e porzh ar prefeti, sioul a-walc'h e oa an traoù, daoust ma oa fuloret lod eus an implijidi, met plijet lod all, gant trakt Stourm ar Brezhoneg skignet un tamm e pep lec'h er savadur. Dileuridi ar vanfesterien a c'houlennas groñs digant ar Prefed bezañ klevet gant an Itron Guigou ar-raok fin miz Du. Sañset e vefe bet prometet dezho un emgav ganti dizale. Gortoz peil, gortoz gwell... L.L.



Burevioù ar prefeti aloubet gant ar studierien

Enorioù Kolier an Erminig da Jordi Pujol

D'ar 7 a viz Du 1992 e oa deuet Jordi Pujol da Vreizh evit resev kolier an Erminig. Meur a brezegenn zo bet. Unan gant Pierre Le Treut (Yvon Bourges ne oa ket deuet), unan gant Per Denez, a oa frotet o tegemer ur mignon a Gatalonia, ha da echuiñ respont Jordi Pujol. Ar spi a c'heller kaout e vo talvoudus an darvoud-mañ evit startaat al liammoù etre Breizh ha Katalonia. Kalz a zo da zeskiñ du-hont evidomp Breizhiz, evel ma legesa da soñj, en o doare, sindikalourien FR3 a oa dirak porstelli Prefeti Roazhon o skignañ traktoù. ■



Jordi Pujol (an trade a-gleiz - Per Denez a-zehou)

A.L.

Jordi Pujol e Paris "Difenn ar rannvroioù"

Pedet ma oa bet gant BILD, ur gevredigezh gall-alaman, da gomz er Sened gall eus Europa ar rannvroioù edo prezidant jeneralezh Katalonia e Paris d'ar Yaou 30 a viz Here. Lavarout a reas edo ar c'hatalaneg en arvar da vezañ "distrujet penn-da-benn e Norzhkatalonia" ma ne gemm ket ar stad c'hall he folitikezh e-keñver ar "bihannvroioù yezhel". Komz a reas ivez a-zivout ar rannvroioù ha lavarout "n'edo ket ar rannvroioù o klask enebañ ouzh ar stadoù nag ouzh unvaniezh ar stadoù". Dañjer a vije, emezañ, o krouiñ rannvroioù artifiisiel en un doare teknokratek hep derc'hel kont eus an unvaniezh istorel ha sevenadurel. Ar galloud ekonomikel a dremeno mui-ouzh-mui e Brusel diouzh un tu, hag er rannvroioù diouzh an tu all. Hervez Pujol, an tamall pennañ graet da feuremglev Maastricht (aon rak ar c'hreizenn teknokratek) a c'hell bezañ disteraet kalz ma vez roet ar galloud d'ar rannvroioù dre ma'z int tostoc'h d'an dud ha d'ar gwirvoud pemdeziek.

M. Kerrain

Lezennoù nevez gant L. Chapel

Ul lezenn nevez a zo deuet er-maez er c'hwec'hkogn d'an 22 a viz Gouere 1992 o kemmañ ar roll lezennoù kastiz.

An dra nevesañ a zo ar gwir bremañ da gondaoniñ un dulezh. Betek bremañ ne oa ket anavezet gant gwir ar c'hastizioù an tudelezhioù-se.

Pa veze graet un dra a-dreuz gant unan anezho, e veze atav un dell-gastiz pe toullbac'h a-enep d'ar rener.

Bremañ e c'hell an tudelezhioù kaout un dell-gastiz o-unan. N'ez efont ket d'an toullbac'h evel-just, met tu a vo d'ar varnerien :

-lakaat anezho dindan diwallerezh ar justis ; an dra-se ne veze graet betek-hen nemet d'ar re a rae freuz-stal

-serriñ unan eus ar stalloù pe labouradegoù (da skouer unan o'ch ober saotrour)

-herzel outo da respont d'ar marc'hadoù stad e-pad bloavezhioù -dispenn anezho zoken (kastiz ar marv evit un dulezh).

Kement all, o kemmañ penn-da-benn ar gwir kastizañ, ne dalvezo evel-just nemet evit an tudelezhioù prevez. An tudelezhioù stad pe foran ne c'hellint ket bezañ kondaonet, da skouer ar Stad, ar c'humunioù, ar rannvroioù...

Ul lezenn-stur diwar-benn surentez ar marc'hadoù-erezhioù a zo nevez deuet er-maez gant Europa d'an 29 a viz Mezheven 1992.

Ret eo, adalek bremañ, lakaat e gwerzh marc'hadoù-erezhioù sur hepkan.

Rediet eo ar marc'hadoù da reiñ resisadurioù sklaer a-walc'h evit ma ouife ar brenerien an dajjerioù a c'helle bezañ gant o frennadennoù. Rediet eo ivez da c'houzout ha barrek a-walc'h e vo ar stalloù da gelaouiñ an dud diwar-benn dajjerioù an traoù pe ar binviji a zo e gwerzh ; ret e vo dezhañ studiañ pizh ar c'hlemmoù a vefe o tennañ da implij ar varc'hadoù-erezh. Hag ar stalloù pe evel ma lavar al lezenn-stur an "daspazher" a rank ivez chom hep gwerzhañ traoù ne gavont ket sur a-walc'h ha ret e vo dezho bezañ barrek da aliañ ar praktikù.

Alies e weler bremañ labouradegoù kirri-tan o lakaat da zistriñ er c'harrdioù gweturioù a c'helle kaout sioù fall a-enep d'ar surentez. Ar memestra a c'hoarvezo evit a bep seurt ardivinkoù all adalek bremañ. Da bep stad en Europa e vo da lakaat al lezenn-se da dalveout. Ur stad a c'hell lakaat er-maez ar werzh ar pezh a seblant bezañ danjerus evit an dud, dezhi da reiñ keloù da Europa, evit ma vefe kelaouet ar broioù all. ■

Petra a fell deomp kaout evit ar brezhoneg ?



I. Kadorid - J. Philippe - Y.B. Thomin - Y.F. Dupuy - H. Kerrain - A. Lavanant - I. Abiven

Tro hor boe da glevet Fulup Kadorid, prezidant Kreizenn Sevenadurel Roparz Hemon, Gwengamp, Yann-Ber Thomin, maer (P.S.) ha kuzulier kanton Landerneve, Herve Kerrain, Kadoriad Stourm ar Brezhoneg, Andreu Lavanant, prezidant Diwan, hag Ivon Abiven, maer ha kuzulier kanton Sant Tegoneg, o tivizout kenetrezo hag o respont da c'houlennoù an animator Yann-Fulup Dupuy. A-du a-walc'h edo ar brezegerien war meur a

boent : evit ma vo graet muioc'h gant ar brezhoneg, eo ret diorren ar c'helenn brezhonek dre greskiñ an niver a skolioù a ro un deskadurezh divyezhek brezhoneg-gallek, ret eo kaout ur skingomz hag ur skinwel e brezhoneg, ret eo krouiñ postoù labour ma vo implijet ar brezhoneg enno. Re nebeut avat e vo komzet eus ar pezh a felle deomp ober gant ar brezhoneg, eus ar plas a felle deomp reiñ dezhañ e-kichen ar galleg. Ne voe nemet Herve Kerrain evit lavaret

Diviz Stourm ar Brezhoneg
"Petra a fell deomp kaout
evit ar brezhoneg ?"

War-dro kant den a oa deuet da Sal Gouelioù Gwengamp d'ar sul 22 a viz Du evit selaou an dud a oa bet pedet gant Stourm ar Brezhoneg da gemer perzh en un diviz diwar-benn "petra a fell deomp kaout evit ar brezhoneg ?".

sklaer e oa ret gellout bevañ gant ar brezhoneg hepken ; an divyezhegezh evitañ (er skolioù pe er vuhez foran) ne oa ket ur pal, met un tu deomp da ren hor buhez e brezhoneg. Degas a rae kadoriad Stourm ar Brezhoneg da soñj deomp komzoù ar skrivagner Tangi Malmanche a lavare "pa vez div yezh gant ur bobl e vez unan dreistezhamm. Hag ar yezh dreistezhamm-se a vo dilezet devezh pe devezh". ■

Digabestr

Manifestadeg e Brest



Ar vanifestenon, a-raok loc'hañ, dirak an ti-kêr

250 den o doa manifestet e Brest, un devezh war-lerc'h ma vo digabestr Vêronique Hunault, evit diskouez o skoazell d'an holl dud tamallet gant ar polis hag ar justis gall da vezañ bet roet harp da "sponterien euskarat". Goulennet o doa ar vanifesterien ma vo didamallet an holl dud bet harzet e-kerz ar mizvezhioù diwezhañ, ha ma vo doujet ar gwir da reiñ ha da gaout bod e Breizh. ■

I. Kadorid

Politikerezh



Ur miz e Breizh

03/11/92 : "Re a dud, a velestradurezh, a liveo-divizout er stad c'hall", a soñj d'ar CNPF, sindikat ar batroneoù. "Ret eo kreñvaat ar rannvroioù, reiñ dezho ur soñj hollek war o zailhoù", eme F. Perigot, rener CNPF. Spontet bras eo ar sindikad gant ar c'hresk a zo kemennet evit an tailhoù-rannvro.

03/11/92 nach a ra gouarnamant Pariz kensinañ Karta Europa a-zivout yezhoù minorelezh, "en abeg da vonreizh nevez" (ar galleg yezh ar republik), eme ministr an aferioù diavaez. "Gellet a raio ar brezhoneg (pe an euskareg) bezañ implijet war tachennoù "zo", hep mont er-maez anezho", eme c'hoazh ar ministr.

04/11/92 : Kuzul Ministr Frañs. L. Le Pensec a bouez war Karta Europa ar Yezhoù Rannvro, bet nac'het sineañ gant ar Gouarnamant. Ur fazi e vefe hervez ministr sokialour an departamantoù tramor. Gouennet ez eus bet e vefe sinet ar garta ivez gant Re C'hias Breizh hag an A.L.E., unvaniezh europat strolladoù broadelour pe distagour.

06/11/92 : daleet eo stalidiour komite ar rannvroioù e Brussels, a-drugarez da J. Major, ministr kentañ Bro-Saoz. Dalc'het ez eus bet ennañ 24 sez evit Frañs, ha kinniget en doa prezidant Lenguadoc-Rouselhon da zerc'hel 13 sez d'ar rannvroioù. Savet en deus a-enep Y. Bourges, a hafval dezhañ n'eus ket tu da lakaat an departamantoù, a zo 200 vloaz istor ganto, nag ar c'hériou bras dindan beli ar rannvroioù. Setu m'en deus kinniget eizh sez evit ar rannvroioù, eizh evit an departamantoù hag eizh evit ar c'hériou bras.

06/11/92 : emvod embregerezhioù yaouank an "Ouest" e Roazhon. Distagañ a ra E. Herve eo ret "kreñvaat an Ouest, tennañ an digempouez gant Bro-Bariz", ha kavout "raktresoù bras" (ar VAL e Roazhon da skwer), ha P. Mehaignerie e vefe ret "gwerzhañ gwelloc'h disoc'hoù ar referendom diwar-benn Maastricht". An daou a-gevret a zo a-du evit lostaat Roazhon ouzh Naoned, a-benn krouiñ ur gêr vras, 2 vilion a annezidi enni.

06/11/92 : klemm a ra Dourioù ha Sterioù Breizh, ar gevredigezh trevoniel, a-enep d'an adlodennañ, oñ ober e reuz ur wech ouzhpenn e Breizh, ha dreist-holl tro-dro da starkell dour Sant-Turiel, lec'h ma 'z eus labourioù dimiwer evit adlodennañ tachennoù labour-dour (400 kilometrad a gleuzioù freuzet, 10 devezh-arat a lanneier difraostet, 25 kmad a hentoù stanket, 72 devezh-terdouaret). Hafval out a ra d'an ekologourien e yelo buan al loustoune eus an douar d'an dour, hag e lakai arvar bras war ar c'hoadoù gwallaozet a-walc'h c'hoazh.

07/11/92 : sinet ez eus bet un emglev etre ar re C'hias hag ar PS e Sant-Brieg evit aozañ ar c'huzul-kêr. Mont a raio J. Mangold da eil-vaer karget eus an dreoniñ, hag e vo krouet postou war an dreoniñ e servijoù kêr Sant-Brieg.

09/11/92 : gouenn a ra Kuzul Ekonomikel ha Sokial Breizh ouzh ar gouarnamant gall sineañ Karta Europa ar Yezhoù Bihan, "diazeg gwirioù al liesyezhegezh en Europa", evit burev K.E.S.

11/11/92 : gouenn a ra Emgann, Pobl, Frankiz Breizh hag UDB ouzh Kuzul Rannvro Breizh respont ouzh ar Gouarnamant Gall, a nac'h sineañ Karta Europa ar Yezhoù Rannvro. Pouezet en deus Kuzul Elzas war an dilenniñ c'hoazh.

11/11/92 : krog eo dek den, tamallet dezho da vezañ roet bod da Euskariz, da yunañ a-stroll e ti-kêr Brest, skoazellet gant dilenniñ da komiteoù-skoazellet da V. Thomas-Hunault, bac'het e Pariz.

12/11/92 : "Amzer da brederiñ" a c'houlenn ar gouarnamant gall a-raok sineañ Karta Europa a-zivout ar yezhoù bihan. Ar vinistrez Guigou a lak a-enep d'ar c'harta nevezadur ar vonreizh gall, a lak ar galleg da "yezh ar republik", ha roll-lijzennoù al labour, a redi kevradoù-labour da vezañ skrivet e galleg.

15/11/92 dael UDB en Oriant, a-benn prientiñ dilennadegoù miz Meurzh 1993. "Menoziou 'zo ganeomp" eme H. Gourmelen, ha krogel eo gant ar

gostezenn un daou vloavezhad a brederiadennoù, a-benn embann ur "program demokratel breizhat nevez". Pal ar strollad a zo dilennadegoù kêr hag Europa, dreist-holl.

16/11/92 "Kontrol d'ar skiant vat, d'an istor ha d'an ingalded e vefe lakaat ar rannvroioù da ren war ar skolioù-meur", Jack Lang, ministr war an deskadurezh.

16/11/92 "Ret eo sikour ar rannvroioù da werzhañ en estrenvro, hag aliañ an embregerezhioù bihan d'an em ledañ war an dachenn europat ha bedel" eme E. Herve, en e rentañ-kont da gannati Frañs.

16/11/92 Divizoù ar c'huzul rannvro (Breizh 4 departamant) : ur c'huzul skiantourien da evezhiañ politikerezh ar rannvro e-keñver trevoniezh ; komiteoù ha komisionoù a zo bet anvet ivez da blediñ gant kudenn-mañ-gudenn an endro. Renel e vo "Kengor rannvro an endro" gant Alain Madelin. Ankeniet eo ivez ar c'huzul gant dazont an elektronagezh e Breizh, dilezet m'eo lod bras pe vrasoc'h eus ijinadennoù CCETT Lannou da vroioù all da skwer.

17/11/92 Veronique Thomas Hunault a zo kaset dirak ar barner, goude bezañ bet bac'het en-dro abaoe al Tañ a viz Here.

18/11/92 : manifestadeg komite skolaet ar vretoned bac'het dirak prefeti Brest. Gortozet eo diviz ar barner evit fin ar sizhun.

19/11/92 : dieubidigezh V. T. Hunault, goude hanter kant devezh toull-bac'h, evit bezañ torret an difenn kejañ ouzh tamallidi all. Hanter kant devezh toull all he doa tremenet ar Vrestadeg e miz Mae c'hoazh.

20/11/92 : klemm a ra Dremmwel, a vod kerent skolidi brezhonek, a-enep ar stad c'hall, a nac'h sineañ Karta Europa evit ar yezhoù bihan : "skwer splann pilpouzezh Gall e-keñver sevenadurioù", emezi. Unvaniezh ar Gelerenier Brezhonek, eus he zu, a gav dezhi ez eus eus Frañs "bro gwirioù mab-den evit lod hepken".

26/11/92 : Kendiviz e Roazhon : "Hag ezhomm a zo eus ur politikerezh ar rannvroioù evit diorren Europa ?", aozet gant Europiz meur, Y. Bourges, E. Herve, F. R. Hutin ha J.F. Poncel en o fenn ■

Ekonomiezh

03/11/92 136 950 den dilabour e Breizh e miz Gwengolo : un digresk a 0.6% e Breizh (4 departamant) abaoe 12 miz. 20% nebeutoc'h a ginnigoù labour eget e miz Gwengolo 1992 'zo ivez.

03/11/92 : asantet o deus an 73 simiad eus porzh Brest ar steuñv bet prientel abaoe bloaz evit kreskiñ efedusted ar porzh : 23 simiad a yelo kuit, war o leve pe da labourat e lec'h all, hag ar re all a vo adstummet. 11 milion a lurioù e kousto evit kreskiñ ar ganderchusted a 35%.

03/11/92 emglev Breizh Peydelour war priz al litrad laezh, 2.05 lur e miz Du, 2.03 lur e miz Kerzu, setu ar priz emglev a zo bet savet gant produerien laezh ar rannvroioù-se.

04/11/92 : daou vilion a vo ret dispign da gompenn porzh-pesketa an Oriant, a lavar ensellerezh al labour. Arvarus-kenañ eo deuet da vezañ postou-labour 'zo evit ar simidi hag ar vartoloded.

04/11/92 : emvod kamb rannvro ar "henwerzh hag an industriezh. Breizh, dilezet m'eo lod bras pe vrasoc'h eus ijinadennoù CCETT Lannou da vroioù all da skwer.

05/11/92 : 700 000 lur a vo roet gant Europa da basketourien ar Gelveneg, dezho da cheñch micher a da vont da blanterien wakame, bezhin japanat da vezañ drebet e-giz saladenn. "N'hon eus ket c'hoant skarzhañ ar basketourien eus ar vro, e-giz reoù Spagn a ya da vicherourien General Motors", eme R.P. Chaver, sekretour komite ar pesketa er Gelveneg.

09/11/92 : 17 simiad o tiskargañ 30 tonenn pesk e Kerroman (porzh pesketa an Oriant), pa 'vez ezhomm 25 den gannañ. An dra-se da lakaat digresk priz an dibourzhañ, hag adlañsañ ar pesketa en Oriant.

09/11/92 : emvod K. E. S. (kuzul ekonomikel ha sokial), o soursial evit an artizaned e Breizh (135 000 den), a-benn aliañ prierterien budjed rannvro Breizh evit 1993. Gant peskerezh Breizh eo chalet K.E.S. 'vez, lakaat en arvar, hervez H. Didou, gant ur program europat war 3 bloaz hag a zo bet nac'het gant ar Stad Chali.

09/11/92 : nijal a raio kuit ur c'harrad-nij a legumaj, kig, kranked ha bleunioù bep sizhun, eus Brest da Japan, adalek miz Meurzh 1993.

10/11/92 : kemennet en deus J.Y. Cozan e vefe savet div durbinnenn-dredan e Brenniliz, da vezañ lakaet da brodiñ pa vez sachet kalz tredan e Breizh. "Kalz muoc'h a uzinoù eus ar seurt-se a vo savet e Breizh achann da zek vloaz", eme E.D.F.

11/11/92 : emvod Kuzul Ekonomikel Breizh. Gouenn a ra Y. Bourges, Prezidant ar rannvro, ma vefe dibabet ur c'hresk a 10%, 18% pe 30% war an tailhoù-rannvro, hag an amprest d'an tiez-bank a ya a-gevret : seul vianoc'h ar c'hresk, seul vrasoc'h an amprest, betek 500 milion a lurioù gall. Ha da vezañ restalet diwezhatoc'h, gant ur c'hresk all war an tailhoù, evel just. Anzav a ra K.E.S. Breizh avat eo gwall enket ar Rannvro etre ar Stad hag an Departamant.

11/11/92 : nac'h a ra labourerien douar, saverien pesked, tud Menez Are e vefe fuilhet dour-hañvouez war tachennoù kumun ar Fouilhez. "Neus ket tu ken deomp degemer lastez Bro-Leon", eme L. Lozac'h, bet saver-pesked. Savet ez eus bet gant tud ar Fouilhez ur gevredigezh "difennet ouzh dilenniñ ha sindikaderien labour-dour kadoriñ enni", hag ar pal anezhi evezhiañ koadoù, tachennoù-chaseal ha dourioù menez-Are

05/11/92 : 700 000 lur a vo roet gant Europa da basketourien ar Gelveneg, dezho da cheñch micher a da vont da blanterien wakame, bezhin japanat da vezañ drebet e-giz saladenn. "N'hon eus ket c'hoant skarzhañ ar basketourien eus ar vro, e-giz reoù Spagn a ya da vicherourien General Motors", eme R.P. Chaver, sekretour komite ar pesketa er Gelveneg.



Pesketaour kregin eus Sant-Kaer : "10 lur ar chilo" Labourat e roomp evit ur bennozh-Doue !"

13/11/92 abaoe pemzektez m'eo digor ar pesketa kregin sant jakez, eo aet d'an traoñ priz ar c'hilo : betek 20 lur, pa oa da 32 lur daou vloaz 'zo. Gouenn a ra pesketourien Breizh e vefe aozet un emvod etrezo, da lakaat re Normandi da anzav e lakaont en arvar ar vicher a-bezh.

14/11/92 : "Re ger eo an tredan nukleel" eme E.D.F., ha setu ma vo savet 16 turbinenn-fioul evit produiñ tredan, hag an daou gentañ da vezañ staliet e Brenniliz, e-giz m'en doa lavaret J.Y. Cozan.

16/11/92 700 tonenn domatez marokad distrujet en Havr-nevez gant produerien Breizh. Evit stourm ouzh emglevioù Europa gant Maroko eo oa, ha taolioù all a zo kemennet da vezañ graet war-lerc'h.

16/11/92 sifroù INSEE c'hoazh : 33 000 den dilabour ouzhpenn eus 1982 da 90, ur c'hresk a 35%, 20 000 den a zo aet da labourat e lec'h all, tud yaouank gant o diplomoù, o tont eus Karazeg, Gwengamp, Felger, Lannou ha Pondivi. Kresk an dud dilabour en ur ober eizh vloaz a sav da 35% e Kemper ha Sant-Brieg ; ha betek 50% e Brest, an Oriant ha Gwened.

16/11/92 Tri milion a Vreizhiz er bloavezh 2020, hervez an INSEE. 44 bloaz an oad-etre (koshaat a raio eus 7 vloaz) ; en un dachenn en em led etre Roazhon hag an Oriant hepken e kresko niver an annezidi, ar re yaouankañ e Breizh. Adalek 2014 e vo brasoc'h niver an dud o vervel eget hini ar babigoù o chenal : war zigresk ez aio poblañs Breizh. Gwashaat a raio kudenn kreiz Breizh, gant ur c'holl a 85 600 annezad en tachennoù-implij tro-dro achann da dregont vloaz.

18/11/92 : koust freuz-stal linenn bigi An Oriant-Gijon, e miz Kerzu 1991, a zo bet jedet da 35 milion a lurioù gall. Nach a ra P. Tiri, bet rener, bezañ kiriek evit an holl fazioù. Tamall a ra tabutoù diabarzh e kamb kenwerzh hag industriezh an Oriant, ha kreizennadur ar galloudoù e Spagn.

20/11/92 : 350 labourer-douar eus Morbihan o deus manifestet dirak prefeti Gwened, o kas maen, bouloùsoù ha grenadennoù, ankeniet ma 'z int gant divizoù GATT, er mare a enkadenn-mañ, enkadenn ar c'hig-moc'h hag ar viou ■

Sevenadur

04/11/92 : kroudigezh "Kreizenn Bretoned ar Bed" e Gourin, ar pal dezhi diskouez levezon Breizh hag ar Vretoned er bed a-bezh, dre ziskouezadegoù, skignañ tifour kleier hag abadennoù.

06/11/92 : degemeret ez eus bet e Breizh dileuridi eus ar Welsh Join Education Committee, a-benn kas war-raok eskemm Bretoned ha Kembreiz yaouank. Ur garta a vo kensinet e Kembre e miz Ebrel 1993.

07/11/92 : degemeret eo bet gant Jordi Pujol, prezidant Generalitat Katalonia, kolier an erming, bet roet dezhañ gant P. Le Treul. "Breizh he deus troet he seloù war-zu Europa, ha setu m'eo deuet Katalonia da vezañ ur skwer eviti" a zistagias Per Denez, prezidant Kuzul Sevenadurel Breizh. Katalonia a zo 75 miliard a luroù gall he budjed, ha 2,5 hini Breizh).

08/11/92 : sinadur un emglev etre rektordi Rhein Uhel (Elzas) hag ar c'huzul meur, ur garta evit digoridigezh skolioù mamm divyezhek da vare distro-skol 1993. Ken e gallez hag en almaneg e vo kelennet enno.

09/11/92 : kinnig a ra A. Bienvenu ur raktras a chadenñ tele e Breizh, 500 milion a luroù gall he c'houst evit ur bloaz, hag a implijfe 300 den.

13/11/92 : gouel ar c'hoariva e Breizh, e Brest, aozet gant Sked. "Bav-mat ha diazezet ken mat eo ar c'hoariva e brezhoneg e bro Vrest, gant Strollad ar Vro Bagan, Strollad Penn ar Bed ha Strollad Plugin, pep a zek pezh-c'hoari bet krouet ganto" eme Y. F. Kerneis.

13/11/92 deuet eo er-maez leirvet roll sonerien Breizh, embannet e Brest, o renabiñ sonerien, saverien tonioù, lec'hioù senñ, hag all, a-hed 330 pajenn, 80 lur.

14/11/92 gouel ar maizioù er Vourc'h-Wenn, aozet gant Kengor ar Beizanted. Gouelioù, c'hoariva, fest-noz ha boued mat a Vro Leon, o'ch ober al liamm etre al labour-douar hag ar vuhez perdidet diwar ar maez. Guy Berthou, labourer-douar, ezel eus ar sindikad ha c'hoarier gant Strollad ar Vro Bagan, en deus kenaozet ar gouel. "Labour ar sindikadoù eo ivez ober kinnigoù nevez, ha n'eo ket klemm hepken", emezañ.

15/11/92 : kroudigezh DASTUM 44. Setu m'eo diazezet Dastum war Breizh a-bezh, hag kreizennoù e

Roazhon, Loudieg, Plafvour, Lannuon, Karaez ha Naoned. Dastum 44, 3 str Harrouys, Naoned, pellgomz 99 78 12 93.

16/11/92 deiziataer ar martolod breizhat a zo deuet er-maez. An holl ditouroù evit mont war vor, ha nevesañ an ditouroù ennañ a zeiz da zeiz evit netra. BP 07 29266 Brest Cadex.

16/11/92 Pondivi : emgav ar farderien gwastilli, diennoù-skorn ha madigoù. Keveladur "Breizh" ha "Peydeloar". Diouer a ra e Breizh tud yaouank da fardañ traoù lipous, "daoust d'hon frodioù bezañ eus ar c'hentañ", eme rener emvod Pondivi.

16/11/92 Enez Vaz ha Gaunioù Gwerran a zo bet anvet da lec'hioù naturel, da vezañ kinniget d'an UNESCO, dezhi d' o lakaat e-barzh "glad ar bed".

20/11/92 : "Ar Vretoned o deus peadra da gomz war dachenn Europa. Mat eo brudañ Europa ar minorelezhioù dre ar peoc'h", eme M. Chauvin, isprezidant Kendalc'h, en ur ginnig "Kan evit ar peoc'h", a vo diskouezet c'hoazh e Kewenn d'an 28 a viz Du, e Brest d'ar 6 a viz Kerzu, hag e Breizh c'hoazh e 1993. "hag e Brussels, marvez", eme c'hoazh M. Chauvin.

20/11/92 : kroget eo Y. Miossec da dreñ e brezhoneg levr Y. le Gallo, "Bretagne". Gant Brud Nevez e vo embannet. ■

Berr ha Berr Sonerezh

"Un abadenn sonerezh gant ar strollad "Triskell" a vo aozet gant Kreizenn Sevenadurel Vrezhon "Roparz Hemon", d'ar

Gwener 11 a viz Kerzu 1992 e-barzh sal C'hoariva Maez ar Roue (e Gwangamp), da 9 eur noz. Priz ar plasoù : 60 l ha 40 l (lazh ar Greizenn, tud dilabour, studierien) Evit rakprenañ ar plasoù e Gwangamp-Kreizenn Roparz Hemon, Levridi Pedrono, Levradi "Les Quilles à la Vanille", E Lannuon : Levradi Gwalann, E Sant-Brieg : Oaled Abherve.

An Oaled

Dalc'h-stummañ Bafa

Etre ar 26 a viz Kerzu '92 hag an 2 a viz Genver '93 e vo dalc'het an dalc'h-stummañ Bafa e Treglonoù, aozet gant an UBAPAR. Gwirioù enskrivañ : 2000 lur. Titouroù : AN OALED, 98 04 07 04. Enskrivadurioù UBAPAR 97 66 56 43. (Brezhoneg gant Bremañ)

An Here

Bez emañ embannadurioù An Here o klask un objektour brezhoneger pe prest da zeskiñ brezhoneg. Evit gouzout hiroc'h, pellgomzit pe skrivit da : An Here Kergleuz 29480 Ar Releg-Kerhuon c : 98.28.10.37.

Youl ar stourm Brezhoneg war f(r)trist

En niverenn diwezhañ e oa embannet ur pennad gant Y.F. Kerneis diwar-benn lec'h ar brezhoneg war F(R)strizh. "20 munutenn nebeutoc'h, emezañ, en abadenn sizhuniek".

45 munutenn n'eo ket 20

N'eo gwir nemet el lodenn vianañ eus ar vro avat. Evel a oa bet skrivet gant ar gevredigezh Sav-Heol en niverenn araok dija, 45 munutenn nebeutoc'h an hini a zo bremañ el lodenn vrasañ eus ar vro, e Breizh-Uhel ha Bro-Wened.

Arabat ankounac'haat ez a Breizh selloc'h eget harzoù departamant Penn-ar-Bed. Diwallomp da gomz evit ar pennadurezhioù a fell dezho astum ar brezhoneg e mirva diadaned Breizh Izelik, bihanaet (hag dilaet) muiañ ma vo gallet. Rak er Paramanterezh (DDE) an Daskarezh, hag er sindikadoù balennerien ivez, e kaver koustus ha dezhommañ ar brezhoneg e-maez Breizh-Izel. Gwashoc'h c'hoazh marteze e-touez ar bolitikerien a Breizh-Uhel, ar re niverusañ hag a-bouez brasañ er C'huzul-Rannvro.

Amzer golet na vez ket adkavet

N'omp ket prest da adkavout ar munutenoù kollet-se, eme Y.F.K. c'hoazh. Re wir. Rak evel ma lavar, ken gwan eo bet respont an emsav ma c'haller gortoz gwashoc'h da zont c'hoazh. Gwan eo bet respont an emsav evel ma e oa bet gwan e-pad an hañv, pa oa bet lamet abadennoù sul en abeg d'an tennis da gentañ, evel bep bloaz, ha d'an douristed diwezhatoc'h, evit ar wech kentañ abaoe meur a vloaz. Lamet ar brezhoneg penn-da-benn e-pad ar 1/4 eus ar bloaz, ha manifestadeg ebet, nemet piknik bloaziek SAB e Roch Tredudon. Netra ouzhpenn. Ne oa ket peadra da nac'h renieren ar skinwel. Hon skinwel-NI, pa larin mat, paet 2 wech gant hon arc'hant : ur wech gant skodennoù-skinwel ar Vretoned (a vo krasket hevlene), ur wech all gant skoazell-arc'hant ar C'huzul-Rannvro maget gant hon zailhoù-NI.

Klemm

Emsav pe vruzun

Perak e oa ken gwan ar respont ? Sed a zo da gavout. Da vare ar manifestadegoù en abeg d'ar Vretoned bac'het en abeg d'o skoazell da Euskariz ne oa ket bet kredet gant an "emsav sevenadurel" mont da vanifestiñ ivez evit ar yezh pa oa hon diennidi, Dollo, Tremel, mignoned ar brezhoneg evel ar re all, o votiñ da lakaat ar gallez da yezh ofisiel. Youl da stourm marteze zo ezhomm. Kleuboù, chapelioù zo a-walc'h e Breizh. Met pet o deus ouzhpenn 100 ezel ? Diwan zo ur skol, n'eo ket ur benveg-stourm. UGB, APEEB, pegen talvoudus e vant, zo gwall strizh o diazezh kevredigezhel ha n'o deus ket da bal kas war-raok ar brezhoneg e pep tachenn. Ar re o deus youl da stourm, evel SAB, n'int ket niverus a-walc'h c'hoazh. Tuta zo ezhomm d'ober. Na vez ket bodet - ar c'h'evredigezhioù a stourm evit ar yezh. An holl pe dost, zo, pe zo bet, ezel da "skourr breizhek ar Burev Europat evit ar Yezhoù Bihan". Met ne ya ar framm-se en-dro nemet e broioù all ar c'h'wech'korn war a seblant. Diouz lenn pajennoù Bremañ ne weler ket e rale kalz tra e Breizh. Lenet hor boa e oa UDB an hini a oa e penn ar stourm evit Karta Europat ar Yezhoù e Breizh. E Katalonia hag Euskadi an hanternoz e vez graet al labour gant ar Burev. Mard emañ ar bolitikerien o'ch ober labour an emsav sevenadurel eo moarvat peogwir n'eo ket gwall ya'ch. Dimp d'o lakaat da wellañ. M. Kerrain

CELTIC LEAGUE Kendalc'h Keltiek Etrevroadel 5 straed Berlioz 29600 Plourin Montroulez Ar c'hendalc'h keltiek etrevroadel a vo dalc'het e Bro-Skos e Skol-Veur Inverness e sizhun diwezhañ miz Gouere 1993 (26-31/07/93). Koustañ a raip £145 (war-dro 1200 lur gall) evit an dud vras evit al lojeiz, ar boued, ar baladennoù, an nozvezhioù, nemet an abadenñ veur. Tem an devezhioù : "Ar Yaouankiz hag ar Bed Keltiek"

Enez Vanav Echu gant ar boan a varv Bodadenn Enez Vanav, an Tynwald, en deus votet gant 21 voutez a-du ha 3 a-enep, evit ma vefe dilezet ar c'hastiz a varv e lezioù-barn ar vro. Ar wech diwezhañ ma oa bet lakaet ar c'hastiz-se da dalvezout war an enezenn a oa e 1871. I. Kadored

Emrenerezh Aragon Disul 15 a viz Du e voe diskouezet o youl gant Aragoniz da gaout un dezvad emrenerezh par da hini Katalonia hag Euskadi. Seizh mil e oant deuet eus Aragon da viMadrid, gant an tren pe ar c'harr-boutin evit kemer perzh en displegadeg a yeas betek ar Breujoù. Tud eus an holl strolladoù politikel a oa eno, nemet ar PSOE (Sokialourien) : ar PP (Tu dehoù) bet tamallet avat da vezañ mouezhiet anvan gant ar PSOE a-du gant an dezvad a-vremañ, ar PAR (Strollad Aragonat Rannvroelour), hag ar CHA (Chuntia Aragonestista), kalz taeroc'h Gwenael Emelyanoff

Dilhad nevez Andersen Pobl Danmark fuloret

Ur wech e oa. Ur wech ne oa ket. Ur wech e oa memestra... Ur wech, eta, e oa bet adskrivet ar c'hontadennoù, dezho da chom hep feukañ den. An tenn, avat, a yeas d'ar c'hleuz. Pobl Danmark, en he fezh, hag ar c'helenner en doa troet danevelloù Andersen a zo fuloret-ruz : embannerien ar Stadoù-Unanet o deus silziget an droidigezh nevez.



Fuloret eo Daniz

Ken kounnaret eo ar C'helenner Glyn Jones, eus Skol-Veur East-England, e Bro-Saoz, gant an doare ma eo bet lamet kuit "kement tra en dije gelllet feukañ al lenner" diouzh e droidigezh, m'en deus goulnennet e vije lamet kuit e anv diouzh an embannadur nevez.

Tamallet en deus zoken d'an embannerien bezañ kinniget kemm dibenn mantus unan eus kontadennoù brudetañ Andersen, "Ar Varc'hadourezig Alumetez".

"Un dibennach eo klask azasaat an danevelloù kaer-se ouzh buhezgezh hag ouzh politikerezh ar Stadoù-Unanet a-vremañ. Ul lodenn vat eus o hoal a zeu eus o yezh dezho hag eus o buhezgezh dibar", eme ar c'helenner Jones, hag a zo un arbennigour brudet eus skrivagner danat an XIXvet Kantved.

En embannadur "naetaet ha kempennet" an Amerikaned e teu ar gerioù "hudouriezh du" da vezañ "hudouriezh fall". Kinnig a rae an embannerien treiñ ar "Sinaad kozh", - en "Ar Verjeleñ hag ar Skarzher-Simnalou", - gant "an den kozh" : gouennelour e oa, gouez dezho, an anvadur "Sinaad". En "Ar Voverc'hig", a bled gant ar marv hag ar vuhez goude ar marv, eo bet tennet gerioù Andersen a skoe ar spered, dre o c'hened hag ivez dre o liv mantus : "yen-marv" a zo deut da vezañ "yen", hep muken.

"Ur wech em boa lavarot, en ur farsal, eme ar C'helenner Jones, e oa kalz re a feulster hag a revelezh e skrijoù Andersen evit speredoù yaouank. N'o

deus det an Amerikaned, m'eus aon, kavet blaz ar fentigell gant ma evezhiadenn."

Un dismegañs eo bet an afer-se evit Daniz a ra ur vojenn eus Andersen hag a lak e oberoù da defizor broadel. "Ur vezhekadenn" eo an embannadur nevez hervez Monique Christiansen, ezelezh eus Bodad Skrivagnerien Danmark. "Un emzalc'h mod-kozh, ken ez eo mod-kozh a-walc'h, eo, emezi, kemm pe silzigañ oberenn un arzour. An droidigezh-se a lak ar skrid da goll e zibarelezh hag a zinerzh ar skeudennoù hag ar vuhez a zo ennañ." Ar pep gwashañ evit Daniz e voe mennad an Amerikaned da reiñ un achumant evurus, -un "happy end", - d'ar "Varc'hadourezig Alumetez". Komz a ra ar gontadenn-se eus ur plac'hig paour-razh hag a rank gwerzhañ alumetez da c'hounit he bara. Ken rivet eo, un deiz, ma strak hec'h alumetez an eil war-lerc'h eben, da gaout tomm. Pep flammig a lak ur sorc'henn da ziwan war he spered. Gant flamm an alumetezenn ziwezhañ e varv ar baotrezig.

"Ar c'hizid, eme M. Christiansen, eo ar perzh boutin da veur a gontadenn. Ne vez ket laouen atav ar vuhez, c'hwil 'oar. "Kontadennoù Andersen, dezho da vezañ savet evit ar vugala, a zo intret gant ar youl da ziskouez ar wirionded ha lod anezho a zo merket don gant un dro-spered gwashaour. Ar skrivagner, bet ganet e Odanse e 1805, a voe dilevenez e vugalezh. Kalz eus

ar pezh en doa beveta a lakaas en e skridoù.

"An Eostig" a zo ur barabolenñ war digasted an dud ouz an jin hag war o doug d'an drevezadennoù izelbriz. "Ar Saprennig" a ziskouez na vez ket gwalc'het atav c'hoant an den da vezañ karek.


kontadennoù arall, evel "Dilhad Nevez an Impalaer", n'int ket ken gwashaour merket int avat gant ar youl da ziskouez gwirionded ar gevredigezh. Hervez kaourien Andersen, n'o deus orbedoù ar stumm-skriavañ dibabet gant embannerien ar Stadoù-Unanet netra da wehout gant doare ar skrid kentañ. Brudet e oa Andersen evit e lennadegoù eus e gontadennoù. Savet e oant, hervezañ, evit bezañ lennet a vouez uhel. Sellet e voe outañ evel ouz un nevezour meur : arverañ a reas geriaoueg hag e readurezh ar yezh komzet gwiet gant gizioù-prezeg ar c'hontadennoù-pobl, ken na savas ur gomz dibar.

Ne vo ket hemañ an tabut diwezhañ diwar-benn oberenn Andersen. Daoust ma'z eo dianav e labour dramaour ha romantour emañ e gontadennoù emesk an oberennoù a vez troet an a liesañ.

"Bez e c'heller krediñ, eme ar C'helenner Jones, e vije bet kavet an afer-se farsus-kenañ gant Andersen e-unan rak douget e oa-añ d'ar fent ha d'an ironiezh."

Alexandra Frean Brit Bartenbach The European (Brezhoneg P Ar Marcheg)

Marevezh Stalin n'eo ket echu




Estonia o kraouiañ he yaouankiz

Bloaz goude an dleublidgezh vroadel e chom toullou-bac'h Estonia heñvel ouz re marevezh Stalin.

Barnedigezhioù pounner a vez embannet bemdez evit torfedoù dister.

Tour an torfedoù, unan eus re uhelañ en Europa, a washas ar reiz da zelv abalamour da enkadenn armerzh ha da ziskar live-bevañ 10 milion hanter a Estoniz.



Ar mesk ar gwallfedoù renablet gant an Impalaer Gwiriou Mab-Den Helsinki emañ skouer ur c'hrennard kondaonet da tri bloavezh toull evit bezañ laeret 25 rouble, hini ur paotr 16 vloaz kraouiet evit bezañ laeret ur vandenn-rod hag hini ur vaouez kozh bac'het c'hoazh 27 vloaz goude bezañ bet kondaonet evit skrapañ-yalc'h.

Kastiz ar marv

Gant lorc'h ez embann Estonia bezañ unan eus ar re a ya ar muiañ war-raok e-mesk broioù nevez Europa ar Reter met Erik Slesby, a zo e penn ar Poellgor, a lavar e talc'her da arverañ Lezennaoueg kriz ar Sovied hag ar c'hastiz a varv.

Ar prozezioù, evit laeroñsioù dister zoken, a bad mizioù ha dre-se e vez astennet an amzer tremenet en toullou-bac'h. Kraouiet e vez gant Estonia 30 gwech muioch a re yaouank eget na vez graet gant Europa ar C'hornôg, ha chom a reont en toull 10 gwech pelloc'h.

Un Estoniad diwar 272 a zo bet toullbac'het

Bez' e tremen ar brizonidi ar pep brasañ eus o amzer e-barzh kelloù strizh, hep sklerjenn hag arbebeuri. Kousket a reont war plenk, hep tamm pallenn ebet, zoken apad ar goañv. Mezeien an toullou-bac'h a ra gant ul louzaouenn hepken evit kement kleñved zo.

"Ma lavar ur prizoniad kaout droug-penn", eme danevelskrid ar Poellgor, "e ro ar mezeg an hanter eus ur bilulenn dezhañ. Ma lavar ur prizoniad all kaout droug-stomok e ro ar mezeg eil hanterenn ar bilulenn dezhañ". Paterei, kreñvlec'h kozh an Dzared, e Tallinn, kêrbenn Estonia, eo an hini spontusañ eus prizonioù ar vro. Bac'hidi a zo rediet da vevañ en deñvalijenn, e-barzh kaouedoù e-lec'h ma n'int ket evit digeinañ, hag e-lec'h ma vezont maget gant ur meni bouilhañs diskennet dezho e kelornioù.

Ne zispiegont o c'heñ nemet da geñver an droiad hag a reont bemdez

war porzh an toull-bac'h. Bouzaret e vezont eno gant sonerezh rock : "kement-mañ a vir outo a gomz kenetrezo", eme an danevelskrid, a zo bet burutelleit kriz gant kargidi Estonia.

Ur bed disheñvel

"Ne c'houzañvije ket hor pobl gwelout muntrerien o vevañ e-barzh kambreier klet ha klouar, a-drugarez d'an tommerezh-kreiz, hag o sellout ouz ar skinwel, evel ma reont e Danmark", eme Raik Saart, penn polis Tallinn. "Ur gevredigezh disheñvel omp hag ur bed disheñvel omp." Stephen Grossman, ur skrivagner genidik eus ar Stadoù-Unanet hag o vevañ er broioù Balt, a lavar : "Ret eo derc'hel kont eus kement-mañ : er vro-mañ, n'ouzer marse hag emae e-barzh pe er-maez eus an toullou-bac'h".

Pelle Neroh, The European (brezhoneg P Ar Marcheg)

P.O.B.L. 1982-1992

Kendalc'h an 10vet Deiz-ha-Bloaz



D. Sztül (jubennour) - Leonid Pliouchtch ha Yann Duchet, Prezidant P.O.B.L.

E-doug an devezh kentañ e voe studiet pizh labour hag emzalc'h izili P.O.B.L. :
 - an dilennadegoù rannbarzh,
 - ar bobluvezhiaedg a-zivout feuremglev Maastricht,
 - an digoradur davet an emsav politikel ha sevenadurel, hogen divizet ha prientel ivez ;
 - gwellaat fram diabarzh ar strollad en ur gregiñ da gentañ-penn gant ar c'hevrennoù,
 - startaat ar c'hienlabour etre ar strolladoù breizhat (U.D.B., Emgann, Frankiz Breizh),
 - lezel pep kevrenn da skoulmañ darempredoù hag emglevioù lec'hel gant strolladoù tost ouzhipp ha prest da genlabourat evit an dilennadegoù o tont ha goude ali ar c'huzul-Ren,
 - labourat evit sevel Europa da zonet a-benn ma c'hello Breizh "diouerin ar Riez c'hall, tamm-ha-tamm".
 Gouestlet e voe an eil devezh da "Europa ha Breizh", klevet "voe teir frezegenn :

- **J. Cevaer** : An armerzh ha Breizh... "Europa gevreadel a ziwano er genksozell, en deneliezh hag en doujañs d'ar re arall".
 - **Y. Fouere** : Perak hon eus lâret "Ya" da feuremglev Maastricht ha dazont ar pobloù hep stad en Europa. Galvet en deus da "genlabourat e Breujoù Strolladoù ar Vro war ar gefridi da zifenn ar vroad."
 - **M. Texier** : Maastricht ha sevenadur hor bro : "Distrujañ a ra ar riez c'hall un hérezh n'eo he hini". Daou vennad a zo bet votet gant izili strollad politikel :
 - Gouenn ar ra groñs P.O.B.L. ma vo sinet Karta Europa ar Yezhoù vihaniver gant ar Riez c'hall.
 - Sevel a ra P.O.B.L. a-enep da wander Kuzul ar "Rannvroioù" ha divizet en deus labourat evit ma vo krouet ur Vodadeg wirion bet dilennet evit Kamb ar "rannvroioù" hag a c'helle votiñ ha divizout evel Breujoù Europa, an eil kamb rekis evit ar werinelezh.

Mignoniezh a zo bet ger-stur a devezhioù-mañ ivez, gant Heil Gourmelon a-berzh U.D.B. ha Yann Puihandre a-berzh Emgann hag deus respontet da bedadenn P.O.B.L. en ur ziskouez youl o strollad da genlabourat a-gevret.
 Mignoniezh gant pobloù arall o veval hiziv an deiz kemmoù liesseurt e Riez hor c'hevandir :
 - Boris Pahor, skrivagnour ha brogarour Sloveniat eus Triest, bet kaset da drevac'hioù an nazied.
 - Nikolaz Raguz, kroat, n'en deus ket gallet dont, siwazh.
 - Leonid Pliouchtch, jedonour, difennour gwirioù Mab-Den ha gwirioù pobl Ukraina, bet bachel er goulag hag e "folldier" Stalin. Displeget en deus L. Pliouchtch penaos "e tifenn gwirioù Mab-Den en ur zifenn re ar Broadoù". E vuhez o vout ur skouer war un dro mantrus ha kentelius evit an holl. ■

Dek vloaz'zo, d'an 20 ha d'an 21 a viz du, e St Brieg, e voe dalc'het kendalc'h kentañ ar strollad P.O.B.L., dindan levierezh Jean-Michel TILLY. Goude bout enoret memor ha labour e gadoriad kent en oa ar c'hadoriad nevez, Yann DUCHET, treset al labour bet sevenet pe voulc'het e-pad an dek vloaz-mañ hag an hini a vo da gas da-benn.

Un tamm Istor Breizh

Traoù 'zo a cheñch buan, ha lod all kalz gorrekoc'h. A-drugarez Doue ne c'heller ket c'hoazh distablaat stuzegezh an dud en un taol-kont. Gant an doareoù signañ nevez hag aozadurioù liesseurt ar stadoù arnevez, an Deskadurezh da skouer, ez eo deuet kalz aesoc'h avat. Ne chom eta d'an enebourion nemet gwirizennañ donoc'h an dud en ur sevenadur a gлот gant ar stuzegezh a zifennont : sed aze ar pezh a reas eskibion Breizh-izel er c'hantved diwezhañ gant "Feiz ha Breizh"... Belak ma voe freuzet ar bloch kristen-brezhoneger uryezhek gant skol Jules Ferry. Ar fazi o deus graet eo n'o deus ket kavet rei diorren ar yezh-se hag a zouge ket stuzegezh na blije ket d'ar Stad ("La superstition parle bas-breton") hag ober anezhi ur benveg gouest e gwirionez da gevezañ ur galleg war an holl dachennoù ha dreist-holl an hini bouzusañ evit an den : hini ar reiz, ar menozioù, a-lese al lennegezh, ar brederouriezh, an doueonezh. Yann-Vari Perrot en doa komprenet an dra-se met dja e oa re ziwet. Ha Roparz Hemon a sammas ar c'hlaouster memestra met och asañt da skirlañ evit 500 a dud hepdan, da c'hortoz ma kreske an Emsav.

Disoc'hoù mouezhiadeg Maastricht Levezon ar stuzegezh kristen

En e bennad-barn a-zivout referandom Maastricht, en niverenn 133, e lavar T. L., gant gwir abeg, ez eo bet trec'h ar "Ya" abalamour da Vreizhiz, Elzasiz hag Euskariz. Un trec'h a-berzh an "broioù bihan" e vefe, sañset. Mark Kerrain, en niverenn diwezhañ, a lavar ez eo aet ar Vretoned ur wech ouzhippenn da heul c'hoantoù ar pennoù bras. Met n'eo ket c'hoazh dres ar pezh a zo c'hoarvezet, gouez d'an arbennigourion... eus an tu kleiz.

Rannvroioù katolik o stuz

Ar wask e Bro-C'hall a ra meneg eus un trec'h a-drugarez, n'eo ket tamm ebet ar broioù bihan, met eus ar gatoliked. Ha n'eo ket forzh peseurt kazetennoù : da skouer LIBERATION 23/9, daoust dezhi bezañ kazetenn vuiañ evit an tu-kleiz gall, L'EXPRESS (9/10), hag dedennusañ : LE NOUVEL SERVATEUR (24/9). E-barzh houmañ e vo ar c'hevredadour E. Todd : "Ar ya" a zo tu krefiv gantañ er rannvroioù katolik o stuz an tu fall er rannvroioù a stuz republikan akabin, lañkour ha hinienelour".

Triekaat a c'heller ar varnadenn-mañ pa lere ouzh kartenn ar c'hwec'hkogn gant an stadoù katolik o hengoun (hervez ar stuz-trevezh relijiel pe ar boazioù-mouezhiañ) o kartenn ar referandom. Paz eus kaoz a "trek'hadenn a-berzh ar gatoliked" e vo marteze un debere-beleion bennak o skrijañ, mat sklaer eo ar sifroù d'an holl arbennigourion.
 Anat eo d'an holl eo cheñchet an traoù e Breizh : digresket kalz eo ar pleustrerezh relijiel (9%), daoust ma chom un tamm mat uheloc'h eget e Bro-C'hall (2-3%). Kenderc'hel a ra da gozhañ met stuzegezh an dud a vez levezonet gant ar spered kristen evit c'hoazh, gant spered an Aviel hag ar vuhezgezh dre vras, hep na vefe donaat ken ar reiz hec'h-unvan evit kelou-se.

Dre vondoug o deus mouezhiet "Ya"

Peurluiñ e vez graet gouz ouzh ar gristenion dre ma vez sellet outo evit "ar glistoumenon hag ar virouton washañ" er boblañs. E Frañs, a fell din lavarout. Tud ar broioù a hengoun kristen o deus mouezhiet "Ya", dre vondoug : setu holl. Evit un darn vihan anezho hepdan o deus en graet o selaoù mouezh ar wask katolik hag an eskibion (war-bouez ar re zo chomet met evel Lustiger) o deus galvet d'ar "Ya" gant entan. Zoken pa oa tud eus an tu dehou o

c'hervel d'an "Nann" : anat-kenañ eo e Plabenneg da skouer. Daoust d'ar c'hudennoù armerzhel a zo gant ar Vretoned (evel ar re all), n'o deus ket mouezhiet "Nann" eta. Ha kement-mañ ne c'hall ket bezañ displeget gant ar meni "spered broadel" a chom c'hoazh gant Bretoned 'zo e-keñver Breizh hag a role fiziañs hag entan dezho : gouzout a reomp n'o us nemet 2% eus an dud e Breizh a c'helle soñjal evel-se, lakaet e oa speredek mouezhiañ "Ya" ar pezh ne gradan ket.

Esperañs ha fiziañs


T. L. a skriv ez eo "ur vouezhiadeg a fiziañs" en dazont. Sklaer eo ez eo diet d'ur stumm-spered a zo chomet er stuzegezh kristen pe led-kristen. Daou seurt relijiel (ha doare da soñjal) a cheller difoc'hañ : hini an anken hag hini an esperañs. Kalz aesoc'h eo gouind e vara o tennañ implij eus an ezhomm a surentez hag a stabiiled o deus an dud, o c'hoari war o ankenioù eta (gw lestoù Jehovah, sektennoù all, ha, war dachenn ar menozioù, doareoù Le Pen pe c'hoazh emzalc'h an holl strolladoù politikel bras : re alies e klasker ober aon d'an dud, c'hoari war o angerzioù), kentoc'h eget prezeg ar feiz en un dra na weler ket, an esperañs emzilezet hag ar garantez, en ur bed e lec'h ma sell pep hini ouzh e interestoù war verr-demen. Plijo pe blijo ket, ar Vretoned o deus sunet ar "fiziañs en dazont" (o tont diwar ar feiz, an esperañs hag ar garantez eta) ouzh brom o mammoù hag oa kristen hag o veval en ur gevredigezh kristen. Ar fiziañs ne vez ket ken gour ha kempouezet pa vez skoulet war bouez an anken. Ar gwir relijiel gristen he deus atourmet ouzh an anken "Nho pezet ket aon" a lavar an Aviel.

Ezhomm ur preder war ur patrom kevredigezh all

Respontet em eus "Nann" da Europa-Maastricht dre ma seblant din bezañ hepdan un istor archant. Ar Pab e-unan (gw Centissimus Annus, 1991) a lavar ne c'hall kevredigezh ebet padout war un diazez kan izel. Ha c'hoant am eus da c'houleñn ouzh lenneion Bremañ peira eo Emsav ar yezh evito : hepdan un dra da zegas muioc'h a archant d'ar Vretoned ? Pe neuze hepdan un dra a ro plijadur deoc'h, ur c'hoariell ? Pe c'hoazh ur benveg o bougen emañ Spered ar Vro evel ma lavere Tangi Malmanche ? Ur vro hag a zo da adsevel penn-da-benn. Evit-se hon eus d'ober d'ar Vretoned kinnigoù nevez ha speredek, kinnig ur patrom kevredigezh all : reiñ a raio c'hoer dezho da adperc'hennañ o feadra. Ar preder nevez-se, hon eus da voulc'hañ ha da gas war-raok, a ranko Klotañ gant ar stuzegezh kristen, d'an soñj, mar fell d'an Emsav trec'h da vat. Ouzhippenn-se, ha dreist-holl evidon, n'am eus douetañs ebet, ma 'z eomp a-grenn war hent an enklask eus ar wironez, ha lusket gant mad ar Vretoned hor c'henvroiz, e vo gwielet e klot ar preder-se ouzh ar feiz kristen, hag e vago anezhi, e-touez ar re achanomp hag a zo kristelion. ■

Yann Manegwenn

Taol-pluenn d'an dilennidi Sant Brieg ha sevenadur Breizh



Dre c'hras Doue hon eus amañ ur stourmer meur war tachenn hor yezh, an Aotrou Dollo an hini eo, kannad ar vro hag eilmaer Sant-Brieg. Er mare-mañ emañ o termal pe o seblantout termal gant un toullad mignonad a bep tu politikel evit lakaat ar stad C'hall renet gant ar PS da sinañ emglev Europa a-du gant ar yezhoù hep stad. Bez' e vo an Aotrou Dollo war ar renk e miz Meurzh 93 evit adtapout e gador a gannad PS eveljust daoust dezhañ bezañ c'hwitet pep tra. Daoust hag-efi e vefe en e soñj dilezel e garg kannad gall ha dont en emsav el lec'h m'en dije ur skoazell efedusoc'h eget hini ar PS ? Peseurt strollad a gemere e Breizh ur seurt emsavur ■

Evel eilmaer e ti kër Sant-Brieg e vefe efedusoc'h hon Aotrou ? Panelloù en hor yezh e kër, ul lec'h a-feson evit Oaled Abherve e kreiz kër, trawalc'h a glasoù evit skol Diwan, abadennoù eus ar vro er CAC nevez anvet "Passerelle", tu da selout an abadennoù skignet gant RBI pe choazh RKB, arc'hant evit hor yezh hag hor sevenadur da vleuniañ e kèrbenn an departamant.

N'emañ ket e-unan a lavarfe lod, ha gwir eo. Maer Sant-Brieg eo Claude Saulnier hag a zo senedour PS ivez. Dalc'het mat eo an ti-kër gant hemañ evit ar mare, daoust ma 'z eus emglevioù nevez o tont war-c'horre goude mouezhiadeg miz Meurzh tremenet. Nevez zo eo bet anvet Jakez Mangold (glas) eilmaer karget eus an andro hag e fell dezhañ ivez kas war-raok hor yezh hag hor sevenadur. N'eo ket al labour a vanko dre ma chom kudennoù luziet abaoe

pell evel lastezeg Saozon da skouer. Evit pezh a sell ouzh stad ar brezhoneg n'eus ket da c'hortoz pelloc'h. Deuet eo ar mare evit an ti-kër da lakaat war sav ur raktrès evit hor yezh hag hor sevenadur ha d'e gas da benn.

Dilojadeg Oaled Abherve

Savet tregont vloaz zo emañ oaled Abherve war-nes da vezañ distallet ur wech ouzhpenn. Emañ Lec'hiet betek-henn e kreiz-kër en ur sal vras a-rez ar straed J. J. Rousseau. Divizet ez eus bet nevez zo gant paotred ar PS reñf hor sal d'ar c'hoariva Gazibul ha skarzhañ ac'hanomp a-dreñv an tigar, er skol Hoche. Paket eo bet an afer prim-ha-prim dre hon gwelet div wech hepken Jean Loup Lecoq eilmaer karget eus ar sevenadur, gantañ Didier Le Buhann kuzulier. Un diviz enep demokratel-rik eo, anat eo, setu perak en doa dibabet Burev

Oaled Abherve kas an afer a -wel d'an holl en ul lizher digor zo tremenet an OF gant respont Saulnier hag an hevelep respont en Telegram a douellas e lennerien dre ma n'en deus ket embannet holl lizher. Pebezh mezh ! An dilojadeg rediet-se zo un taol fall-tre evit ar brezhoneg a-berzh an ti-kër. Emeur o klask mougañ ar muiañ ma c'heller pouez Oaled Abherve e Sant-Brieg. Taget on bet va-unan gant Didier Le Buhann dirak ar gerent all eveltañ chomet er sal da gontañ goude an divizoù, o rebech din bezañ broadelour evel tud all ar Oaled ha "n'hon doa netra d'ober gant Diwan", emezañ, o rebech din ive implij an Oaled evit Emgann, o vezañ kredet degas war ar c'hazetenn dilojadeg kuzh an Oaled ... Lavarout ran sklaer n'on ket evit asantiñ seurt arguzennoù a zo tu gin frankiz pe den d'en em ren e-unan.



Ur gentel vrezhonek evit deraouidi e sal Oaled Abherve

GALV

Evel ma c'houvezit ez eus Skolaj Diwan Roparz Hemon er Releg e-kichen Brest, ar skolaj nemetañ e Breizh e-lec'h ma vez bevet e brezhoneg ha ma vez kelennet ar pep brasañ dre hon yezh. E tu-hont da se, emeur o komz mui-ouzh-mui eus sevel ul lise. Emeur o klask neuze reñf lec'h d'hon skollajidi o vezañ brezhonegerien. Siwazh deomp n'omp ket pinvidik a-walc'h evit dont a-benn da sevel lodenn vrezhonek holl levradoù da vezañ tost par da lodenn ar galleg. Mankout a ra kalz a obereñnoù deomp, zoken e-touez ar reoù vrasañ a zo bet er yezh betek-henn. Alies e vezont diviet ha n'o c'haver mui da breñañ. Setu, ur wech ouzhpenn, hen gouzout a reomp, e c'houlennoomp sikour digentañ.

M'hoc'h eus meur a skouerenn eus ul levr, marteze e c'hellfech profañ unan deomp. Ma 'z anavezit tud divrezhonek hag o defe levrioù brezhonek, ha na ouifent peira ober ganto, roit dezho da c'houzout ez eus to d'o profañ da dud a raio ar gwellañ implij a c'hellfed ober anezho. Peotramant ma 'z oc'h erru er serten stad, pe un bad a vez, hep herezh vrezhoneger, e c'hellfech iegañ holl klaskad levrioù da vugale Vreizh. Trugarekaus e velfont deoc'h da viken evit ho road.

Penaos e vo graet war o zro ur wech erru ganemp ? Etre daouarn ul levrouger a-vicher e vout lakaet ha gwarezet. Eveltjust ne vezo ket lezet dornskridoù pe al levrioù priziusañ etre daouarn krennaded, met ma vez o implijout d'ober e-kerz ur gentel bennak e vo graet luc'hellennoù anezho. Kalz a aked hag a evezh a vezo lakaet evit o mirout rak anavezout a reomp talvoudgezh (ha na vefe nemet kenwerzhel) al levrioù brezhonek, hag ouzhpenn e c'hallit krediñ ac'hanomp pa ziskuilomp deoc'h ar bri a zougomp da zanvez Breizh. Mil bennozh a lavaromp deoc'h a-raok.

Gireg Konan

Skolaj Diwan Roparz Hemon
P.S. E veltar m'hoc'h auz levrioù diwan-benn Breizh, pe danvezoù all zoken, d'antenn dezho bezañ skrivet e galleg pe en ur yezh all, e d'genarfeomp gant palidur. Da skouer, n'hoe eus enklaskadeg miz abaoe evit c'hoazh.

Evel Prezidant Oaled Abherve abaoe miz Du 1990 em eus klasket atav kaout darempredoù mat gant skol Diwan hag e kendalc'hin. Stourm Oaled Abherve ha hini Diwan eo an hevelep hini evidon, hini dazont ar brezhoneg.

Steredenn

Savet eo bet Steredenn un toullad bloavezhioù'zo. Bodañ a ra Diwan, Oaled Abherve, SKV, da lavarout Sonerien ha Kanerien Vreizh, Nevezadur hag all... N'eo ket tud a vank e-barzh. Daoust da se n'eus buhez ebet gant ar c'hevread. Steredenn n'eo chomet nemet ur menoz koulz lavaret, morgousket ha divuhez. Mar fell da Sant Brieg bezañ Kèrbenn Aodou-an-Arvor perak ne vefe ket savet diouzhtu, pe er Passerelle pe en un tu bennak all e kreiz-kër, un ti bras a vefe holl nerzhioù Breizh e kement a sell ouzh he yezh, he istor, he glad, he reovniezh, he armerzh, he sevenadur ar dachenn an departamant.

Daoust hag-efi ez eus un dazont evit departamant kostarmorik hagant ar kostarmorikaned, setu tudoù ur d'enn all a goust ker zud dimp. E miz Meurzh 1992 gant ar miz Meurzh 1993 em Josselin hag hini Saulnier hag emsavet n'eo ket hini Breizh pe anvad ar vro met hini o lazioù diennel arc'hantel e-keit ha ma vado.

Neuze arabat e chomfe pelloc'h Steredenn da gousket !

Kudenn ar radio e Sant-Brieg

Pa oa bet savet Radio Breizh-Izel, d'ar 6 a viz Ebrel 1982, e oa sañset skignañ sklaer war Sant-Brieg hag ar vro tro-dro. Dek vloaz goude ne vez doajet tamm ebet da gement-mañ. Klevet 'vez mat betek Kastellaodren ha dre ma teuer war-du Sant-Brieg e tigrask buan nerzh ar skignadeg lonket tamm-ha-tamm gant COB FM. Kenavo Sten Charbonneau, keleier Benez Grall, evit an hanter-kant mil a dud a vev e Sant-Brieg ha war-dro. Petra'fell deomp ma n'eo ket klevout kenkoulz abadennoù brezhonek Radio Kemper ha ma vez klevet ar re c'hallek skignet dre amañ noz-deiz. Pouezus eo dazont ar yezh. Evel hon eus ar gwir da glevout anezhi ! Kudenn ar brezhoneg n'eo ket kudenn ti-kër Sant-Brieg, anat eo ! Daoust da se eo e labour paañ binvioù aratozh

evel maz eo bet graet gant Gwengamp e Kastell Plik evit ma vefe sevenet hor gwir da glevout ar brezhoneg war ar gwagennoù.

Stallañ panelloù diyezhek

War ar poent-mañ e c'helle kër Sant-Brieg kemer skouer ur wech ouzhpenn war ar pezh zo bet graet e Gwengamp. Evit ar mare n'eus diforc'h ebet etre Sant-Brieg hag ur gër all bennak lec'hiet e-kreiz al Limouzen, pep tra a vez skrivet e galleg. Hon dilennidi muiañ-karet a lavar eo ar yezh-mañ yezh tud Sant-Brieg. Gwir eo evit al lodenn vrasañ. Bez' eus memestra 10% eus an dud a gomz brezhoneg amañ hervez un enklask kaset war-raok 10 vloaz zo bennak.

O stallañ panelloù diyezhek e Sant Brieg e tiskouezfe ar gër-mañ hag hon dilennidi da gentañ, eveltjust, penaos e legemeront an dazont evel ur werzhalezh kevreadel-sevenadurel evel ma vez degemeret muioc'h-mui gant an holl bobloù dre ar bed a-bezh. Mar fell da Sant-Brieg chom troc'het eus Bro-Dreger ha Bro-Ouelo eus un tu hag ober memestra gant Bro-Benteur eus tu ar reter, dre vezañ hepken penn a-raok melestradurezh ar stad c'hall er vro, n'eus dazont ebet eviti. Anat eo n'eus ket ezhomm eus Paris evit ren aferioù Breizh na re rannvro Sant-Brieg.

Neuze e fell deomp kaout panelloù diyezhek e Sant-Brieg !

Labour Oaled Abherve

Daoust d'ar c'hudennoù konlet a-raok e chom arbenn bezañ Oaled Abherve ur greizenn sevenadurel vrezhek a bouez bras e Sant-Brieg.

Manifestadeg S.A.B.

Gervel a reomp kement hini da zont amañ d'ar **sadorn 26 a viz Kerzu** da gemer perzh er vanifestadeg aozet gant SAB evel bep bloaz. Ar wech-mañ e kerzhimp war roudoù Frañsez Vallee (Abherve), Meven Mordiern, Ernault, Aboezen a zo bet kelenner amañ er skolaj Anatol ar Braz e-pad an eil brezel bed, ha skarzhet kuit peogwir en doa kredet sevel kentelioù brezhonek, arabat disorjal ivez Abel Omnes a reas Brezhoneg a pep skolaj ha lise e-pad pell.

Mikaël Korle

C'hoant deskiñ ober ur c'hleuz

D'ar Sul 6 a viz Kerzu 1992 eo pedet an holl dud a volentez vat da vont da Blouedern (harp e Landerne). Eno, war zouarou labourer gant Goulchan Tomin (a ra labour-douar "bev") e vo graet ur c'hleuz da zispartiñ div lodenn labour : unan bladig a-walc'h hag un all muioc'h war he hant. Ur c'hleuz a c'hiz kozh e vo, savet gant an dorn ha gant ostilioù dorn, met mekanikaet e vo al labour diboullañ douar ha taoñwalc'h. War al lec'h e vo diskouezet penaos ober gant Mikael Madeg, nevez embannet gantañ ul levr war an doare d'ober kleuzioù e Bro Leon, ha graet gantañ ouzhpenn daou c'hant metrad a

gleuzioù e-unan dija. An doare gwellañ da zeskiñ ober ur c'hleuz eo bezañ kemeret perzh. Ar gartenn a ziskouezo deoc'h pelec'h e vo : e Kêr Gorneg Vras, etre ar Roc'h (Roc'h Morvan) ha bourk Plouedern. Loc'het e vo al labour war-dro 9 eur mintin met ne vern peur e c'helloc'h en em gavout. Gwelloc'h bezañ gwisket evit gallet padout e-pad an deiz o labourat diouzh an amzer a vo (heuzoù, dilhad sira, manegoù, boned...). Ha m'ho peus un ostilh dorn (pal, pal-forc'hatañ dreist-holl) pe ur garrigell a c'hellfec'h degas, grit. Al lec'h a zo bras kenañ a-hend-all. Ne vo ket paet an dud. Dav deoc'h gouzout avat e vo klasket ober ur bern bruderezh evit an devezh-mañ, e doare ma vo kalz anezho a-raok ha goude, er c'hazelennoù hag en tele, na pa ve ken. Un arouez eo eta met ouzhpenn un arouez. N'eus forzh pegement a dud a vo, plas a vo dezho rak ur c'hleuz a gant metr bemak emaoimp e soñj ober. An dud a zo e soñj dont da labourat hag a vo en em gavet a-benn dek eur a c'hello kaout o lein evit netra. Ret e vo avat degas kelou a-raok ar c'hentañ a viz Kerzu, en ur bellgomz

pe skrivañ da Goulchan Tomin, Penarven, 29800 Ar Roc'h Morvan (pellgomz : 98 20 45 33). Merenn a vo roet d'an holl a vo war al lec'h d'an eur-se. E kenkaz e vefe re ziaes an amzer (glav bras, pe skorn) an devezhiad kleuziad a vefe ampellaet ha lakaet d'ar Sul, d'an driek a viz Kerzu, d'ar memes eurioù.

Evit gouzout hiroc'h en ur c'hiz pe c'hiz, gwelet war-eeun gant G. Tomin.

KELAOUENN
Breizh gant ar minitell

Kelc'her berr
Goullou ha festou noz
Skoat - somerezhz keroll brezhoneg
Chomlec'hioù, tiorou a-bao-seurt
Levrioù nevez embannet
Skol Uhel ar Vro

Kelc'her
e brezhoneg
hag e galleg

Kasit Kelc'her d'omp
r 99 87 69 12 faks 99 63 82 28

3615 KELA

O paouez dont er-maez : Komz niverenn 5

**BREZHONEG
ER SKINWEL**

**FRANKIZ
? ER TELE
?**

**Manifestadeg
Sadorn 26
a viz Kerzu
da 3e e Sant Erieg**

Ret 'vije deoc'h bezañ gwelet ... 13 kontadenn fentus Bro-Dreger

Dastum ha Dastum Bro-Dreger a zo o paouez embann ur gasetenn hag ul levrig, warno 13 kontadenn fentus eus Bro-Dreger, kontet gant : François Briand, Louis Briand, Louis Le Gall, Jean Le Pezron, Yves Le Troadec, Jean Lintanf, Yann Poëñs ha Maria Prat.

An Tregeriad a blij dezhañ farsal ha kontañ kaozioù, an holl e Breizh a oar se. N'eo ket gwir eo hemañ un den trist o chom en ur vro deñval evel ma lâre skrivagnerien romantel an amzer dremenet, Ernest Renan, Anatol ar Bras, Charlez ar Goig ha meur a hini all.

Abaoe m'emañ o vevañ war an tamm douar patatez-mañ e plij d'an Tregeriad c'hoañ gant ar gerioù, sevel rimadelloù, tezennoù ha kontadennoù. Er gasetenn-mañ e kavoc'h un dibab kontadennoù fentus disheñvel en ur

stumm ha heñvel a-walc'h koulskoude an eil eus eben. Komz a reont holl eus ur bed aet da goll pe dost, taolenniñ reont ul lodenn eus ar vuhez a-wech war ar maez. Tanav eo an anveurez anezhe alies hag arabat eo klask enne lennegezh uhel. Koulskoude eo yac'h ha gwenn brezhoneg ar c'hontadennoù hag ar pezh a ro buhez ha blaz dezhe ivez eo ar mod da goriant hag ar pouez-mouezh, pouez-mouezh brezhoneg Treger dilezet alies gant an nevez-vrezhonegerien.

An istorioù-mañ n'int ket graet evel-just evit bezañ lennet met evit bezañ selaouet. Mar plij deoc'h eta brezhoneg ar bobl, brezhoneg loue a sev, brezhoneg gantañ c'hwezh-vat ar mel gouez nijet eus torgosoù kleuz Bro-Dreger, goulenit ar gasetenn-mañ digant :

Dastum, 16 str Penchoet, 35065 Roazhon Sedeks. Pellgomz : 99 78 12 93, pe Dastum Bro-Dreger, 8 str Haras, 22300 Lannou, pellgomz : 96 46 59 11, o kas ur chekenn 88 lur (80 lur ar gastenn hag 8 lur mizoù-kas).

Ur bloavezh e Pondivi (levrenn I)

Imbourc'h 273/1, 1992, 114 p., 30 lur
Diskuliañ a ra didro Youenn Olier d'al lenner, en deizlevr-mañ (dibenn 1948), e hentadur personel d'ar post ma oa nevez-dimezet ha mennet d'an em rein d'an obererezh emsavel, nemet o kavout ur bem skolioù a-bep seurt war e hent : hini ar vicher peurgelket. Ar boaz dibaot, ha prizioù evit istor an Emsav, en deus dija da neuze da skrivañ ar prederadennoù a zeu dezhañ, dreist-holl diwar e lennadurioù niverus : Roparz Hemon, Lan Inizan, Abeozen, Maodez Giandour, Jakez Riou, Saunders Lewis, Vergilius (Virgile) ha Bossuet... Burutellañ a ra ivez dizamant Chateaubriand, Bernanos ha Hywel D. Lewis. E-keñver buhez an Emsav e ra meneg dreist-holl eus F. Gourvil, V. Fave, G. An Timeur (Latimier) ha Martreg (Martray). Prederiet eo gant ar pezh a rank kemer en Emsav hag e wel ar strollad politikel renet gantañ, "Emsav Pobl Vreizh", e "treuzgellet", emazañ, en abeg da gartennoù pleustrek a-benn ar fin. En em gweuz a ra anat e c'haldigezh don : ... ur gellennadurazh politikel brezhon na ... e c'hie ket ar feiz (p. 42), ha broudet gant ... eul-se e pled gant kraoù diaes hag a-seurt evel ar vroadelouriezh (p. 67) pe ... anezhoù (p. 85), peadra da vagañ hor ... a-vremañ diwar o lenn.

Brezhoneg 2000 - live 1 - gant Yann-Bêr Kemener - niv. 78 Ar Falz - 40 lur

Ar c'haierad 50 bajenn-mañ zo bet savet evit skoldi ar pevare klas. 18 kentel a gaver ennañ, savet bep tro war an hevelep patrom : A/Testenn, B/Geriaoueg, C/Yezhadur, ha D/Poelladennoù.

Da vezañ goulenet digant Ar Falz, 20 straed Kersko, 29600 Montroulez.

Taolit evezh : daou embannadur e bet graet. Evit kaout an embannadur e peurunvan ez eo ret goulenñ an hini PEUR. A hend-all e vo kaset an hini ETRE deoc'h, da lavaret eo an hini "eteranneyzhel".

Tostaat a ra fin ar bloavezh ha mare an hetoù eta !

Diwan Sant Nazer



Diwan Sant-Nazer a ginnig deoc'h kartennoù bloavezh-mat, gwenn ha du, ment 10,5 X 15 cm. Gwerzhet e vezont leir-ha-leir :

- 3 c'hartenn : 10 L + 2,50 L
- 6 kartenn : 20 L + 2,50 L
- 9 c'hartenn : 30 L + 2,50 L
- 12 kartenn : 40 L + 2,50 L
- 15 kartenn : 50 L + 2,50 L

Goulenit anezho digant :
Diwan Sant-Nazer
Yann Jameron
34 straed Claude Bernard
Kerlede
44600 Sant-Nazer

Lennit
al liamm

Skrivañ da AL LIAMM
16 straed des Fours à Chauz
35400 - SANT MALO -

Koumanant bloaz 150 lur
(studierien, tud dilabour
100 lur)

"Ar Vastardez" - Brud Nevez gant Yann Vadezour Lagadeg.
"Hounnezh a zo ur vastardez pe hennezh a zo ur bastard". Petra a dalveze ar gêr-se e spered an dud gwechall, dispriç, truez ? An daou seurt marteze. Ar pezh a zo sur eo n'oa ket ul lesanv aes da zougen !
Div lodenn a zo e-barzh al lev-mañ : istor mamm ar vastardez ha hini ar vastardez. 60 lur an tamm.
Mesidoù
40, bis straed ar Republik
29200 Brest

Bep daou viz lennit
AL LANV

59 hent Kerdronioù Vihan
29000 Kemper

Koumanant bloaz : 130 lur
Skoazell adalek 160 lur

Leiz ha Sevenadur

Imbourc'h, Leurgêr ar Marchiz 56230 Kêrbarzh (250 lur ar c'houmanant), niv. 274, 68 p., 20 lur.
Mennad azerion al levrig-mañ a zo diskouez n'eus ket a eneberezh etre ar meiz hag ar feiz, met kenglorerezh kentoc'h, ha peurgelket war un danvez a zo tost da galon an nevez-vrezhonegerion : hini ar sevenadur. Kavel e vo e-barzh un deil - a-bez'h ar bab - savet gant ar C'hardinal Poupard war an emzalc'h a rank kaout an liiz e-keñver ar sevenadurioù. An abegoù a vez roet a zo dedennus ha pinvidikaus-kenañ, ha n'eo ket heñvel "dour benniget".
Ur studiaden ma zo bet troet ivez war an hevelep kraf diwar bluenn ar C'hardinal Daniélou, met diouzh saboent doueriet an istor : peseurt ster a ranker reiñ da ramadur ar yezhoù, da istor Babel pe d'an treuzdougadurioù-poblañs, da skouer. Kinniget e vez ouzhpenn-se ur sellad prederoniezhel aes da lenn war al liturgiezh, selliet evel kreizig-kreiz hag "enkorladur" ur sevenadur.

Embann

Nebeutoc'h a bratikoù

Gouel al levrioù Karaez miz Du 92

Evel bep bloaz bremañ oa stalioù levrioù a-zaore e gouel Levrioù Karaez. Kaer e oa kinniget pep stal e sal vras ar sportoù. Brav eo deut an taol gant Egin er bloaz-mañ c'hoazh. Siwazh, rak ur siwazh a zo, nebeutoc'h a bratikoù zo bet ha dipitet oa stalidi ar gouel. Diouer a vruderezh a laro lod, daoust d'an holl skriteleoù dasparzhet e Breizh. Diouer a vuhez e-pad an devezh gouel a lavaro lod all. Plijus ha dedennus-tre oa memestra pourmen etrezeek renkadennoù levrioù ha gwelet embannadurioù nevez liesseurt ha liesdoare. Emgav vez roet deomp 'benn bloaz. ■



Stalioù embannadurioù Hor Yezh ha Coop Breizh


Gwerzh Dre Lizher

Setu bremañ daou vloaz vez embannet gant Keit Vimp Bev c'hoarioù deskiñ en o zouez ar c'hoari MEMOR, GWEZBOELL, HATOUP a gavot kinniget brav e diabarzh katalog "Gwerzh dre Lizher" Nedeleg 92 !
Ur gevredigezh lezenn 1901 eo Gwerzh dre Lizher. Fellout a ra dezho kinnig deoc'h un tañva deus an embann e brezhoneg ha sikour an embannerien da gavout gwerzh d'o zraoù. Evit ma vefe muioc'h-mui a draoù embannet e brezhoneg, evit ma vefe deus ar brezhoneg er vuhez foran, brudit al levrig-mañ tro-dro deoc'h.

G.D.L. - 29520 Laz

Sac'hlig : goulennit G.D.L. ha dasparzhit anezhañ en ho skoll, labour, kevredigezh kentelioù-noz !

bremañ 135 - miz Kerzu 1992



Ur gelaouennig nevez evit ar vugale Dizale, a-raok Gouel Nedeleg e teulo er-maez ur gelaouennig evit ar vugale. Kenembannet gant embannadurioù Milan (Toboggan) ha Bro Euskadi (Xirrixta) ha Breizh e vo "Moutig". Ur prof a-zaore evit ho filhor pe filhorez ! Kinniget vo deoc'h a-benn niverenn a zeu Bremañ, mignon nevez ar vugale : ar c'hazh Moutig !

MOUTIG
16 STR PAUL BORROSSI, 29000 KEMPER
KOUMANANT-BLOAZ : 250 LUR

18

Levrioù nevez

"Hor skrivagnerien" Studiaden diwar-benn buhez hag oberoù un nebeud anezho - gant Louis Dujardin embannet gant Mouladurioù Hor Yezh - Levrenn 1 - Pevare Trimiziad '92 - 70 lur an tamm

E-pad ar brezel en deus an Ao. Dujardin, mezeg e Lokouman-Leon, met ivez furcher bras war al lennegezh vrezhonek, embannet pennadoù sizhuniek er gazetenn sevenadurel Arvor. L. Lok e vezent sinet gantañ, hag enno e veze kavet notennoù a bep seurt diwar-benn hor skrivagnerien koulz ha diwar-benn an doare da ober gant an dihelloù-parrez. Soñjet o deus an embannerien e vefe mat adembann an holl bennadoù-se, hag aotre an hegarat familh an Ao. Dujardin o deus bet d'hen ober.

An danvez a vo kavet e pennadoù an Ao. Dujardin a zo disheñvel diouzh an hini a zo bet kavet en Istor lennegezh Vrezhonek an Arzerzh-mañ gant Aboezn -ha pegouiz e adembannet al lev'r ken talvoudus-se ? - hag ivez diouz an hini a vo kavet e lev'r Lukian Raoul, war ar stebn gant Embannadurioù Al Liamm. Gant an Ao. Dujardin e teu "Pennadoù-kaozh" kentoc'h eget "Pennadennoù frammet-ressis, hag-er-estrer-wiñ, diouz ma tro, evit dudi e Embannerien, an anaoudegezhioù denialhet gantañ en e voestadennoù fichennoù. Evel m'emaint e vint dedennus-bras da gement hini a bled gant studi hol lennegezh.

Hanter e galleg, hanter e brezhoneg e oa bet embannet Arvor da gentañ. Ken-se 'ta eo "er yezh all" eo bet moulet pennadoù kentañ L. Lok. Soñjet o deus embannerien Hor Yezh e oa gwelloc'h o lakaat e brezhoneg, a-benn gallout embann an holl en ur rummad hepken : gant Yann Dasbordes eo bet brezhonekaet an testennoù gallek -o terc'hel soñj ne oa ket ul labour lennegel a oa eno d'ober- en doare ampart ha barek a zo e hini.

Kinnig a reer ar pennadoù diouz urzh alfabelek anvioù brezhonek an dud int bet savet diwar o fenn : danvez daou lev'r a zo er pennadoù-se. Gant anvioù brezhonek ar skrivagnerien e vez graet : an anv "hervez al lezenn" a vez meneget atav, avat, a-benn chom hep dihenchañ, e milendall an

dihellaouegi, ar furcherien a garfe mont pelloc'h gant ar studi. Teir gwech en deus an Ao. Dujardin savet skridoù a-benn kloukaat pennadoù embannet gant tud all : ar pennadoù-se, a zo bet abeg dezhañ da gregiñ en e bluenn, a zo bet dastumet amañ ivez : an oberourien anezho a oa Mari Riwalen, bet renevez Kelc'h Keltiek ar Palem, sekretourez Erwan ar Moal hag, evit echuiñ, renevez ar C'hloz e Douarnenez ; Maodez Glanndour (Loeiz ar Floc'h) ha Kloareg ar Vreizid, da lavarout eo an Ao. Chaloni Batani, person Sant Vaho e Kemper. N'eo ket bet adembannet studiaden Yean ar Gow war an Ao. Ao. Moal, Kervarker hag Harri (Gwalarn niv. 136-137, Mae-Mezheven 1941).

EVIT AR BREZHONEG
EVIT AR BREZHONEG
EVIT AR BREZHONEG
EVIT AR BREZHONEG

Kazetenn evit deskiñ brezhoneg
B. P. 41 - 29870 Lannilz
6 niverenn : 75 lur

Ber eo bet buhez Arvor. Ken-se 'ta, zoken o terc'hel kont eus an teir c'helaouenn all meneget, n'eo ket gwall vras niver ar skrivagnerien a zo bet pletet ganto : pemp hag hanterkant en holl. Ne seblant bezañ bet urzh ebet o ren dibab an Ao. Dujardin : perak komz diwar-benn hemañ kentoc'h eget diwar-benn henezh ? Diwar atiz e lennadurioù, diwar atiz ar goulennoù graet outañ, diwar e faltazi pe diwar ar stad m'edo e fichennoù en deus labouret. Salv m'en dije gallet hen ober e-pad hir amzer ! Neuze hor bije marteze danvez ur gwir Istor eus hol lennegezh. Forzh penaos eo plijus an doare digor ha diardoù a zo gant e bennadoù, marteze dre ma 'z int bet savet dres hep liamm ebet etrezo, hag atav war ar prim, a-benn bezañ erru e koulz evit "an niverenn da zont er-maez hepdale". Dimp ez int priziuz ha talvoudus.

Per Denez
Da zont er-maez "Hor Skrivagnerien 2" gant Hor Yezh - Tereza Dasbordes - 1 plasenn Charles Peguy - 29260 Lesneven

19

TAOLENN

BREMAÑ niv. 135
miz Kerzu 1992

Lizhiri	2
Reuz er Prefet	3
Politikerezh	4-5
Ur miz e Breizh	6-7-8
Skinwel trist	9
Pobl Denmark fuloret	10
Estonia	11
Kendalc'h P.O.B.L	12
Maastricht	13
Taol-pluenn	14
Galv Diwan	15
Endro	16
Embannadurioù	17-18-19
Emvod ren BREMAÑ	20

Maketenn gant Lena Louarn ha J.M. Roynard.

Skoazell difaziñ gant Olier ar Mogn - Iwan Kadored - Marial Menard.

Pennadoù gant Lena Louarn, Iwan Kadored, Hegareg, M. Kerrain, Gwenael Emelyanoff, Paskal ar Marcheg, Yann Manegwenn, Mikael Korle, Gireg Konan, G. Tomin, T.G., P. Denez.

Luc'hskudennoù gant Lena Louarn, JM Roynard, Klaod an Duigou, OF, P.O.B.L., M. Korle, Herve Bihan.

Tresadennoù Paskal ar Marcheg.

Renerez BREMAÑ : Lena Louarn

Skrivit e-barzh BREMAÑ ! Kasit ho pennadoù, gant skudennoù, dreist holl ! war baper, pe gwelloc'h pladennig a-raok an 20 a viz Kerzu ! Trugarez deoc'h.

Ar pennadoù ne engouestlont nemet ar re a sin anezho. An orinnoù ne vezont ket restaolet.

Koumanant : 180 lur ar bloaz, skoazell : adalek 200 lur ar bloaz.

BREMAÑ,
8 ru Hoche,
35000 Roazhon, BREIZH
e 99 38 75 83
faks 99 63 82 28.

bremañ 135 - miz Kerzu 1992

BREMAÑ

ar gelaouenn vrezhonek a fell dezhi kreskiñ



Bodet miz zo e Karaez, kenskriv-erien ha kenlabourerien Bremañ a oa bet o pleustriñ war dazont ar gelaouenn. Penaos kreskiñ niver ar goumananterien, gwellaat danvez ar gelaouenn, skañvaat ar pennadoù, dedennañ evezh al lenner gant keleier e vro. Un dibenn-sizhun "kelaouennerezh" labour ha studi zo bet divizet ober e penn kentañ 93 gant skoazell kelaouennerien a-vicher.

Pal Bremañ zo dont er-maez bep pemzektez, bep sizhun. Evit-se eo ret tizhout ar 1000 koumananter, hag evit-se dont da vezañ ur wir gelaouenn ha n'eo ket ur "magazin". E soñj e oamp kaout un tamm yalc'had gant ar C.R.L., Kreizenn Rannbarzh al Lennegezh, er bloaz-mañ evit tizhout ar pal ; kemer stumm ar gelaouenn "Le Tregor" (ment ha paper). Nac'het eo bet deomp ar skoazellig a c'houlennemp ha rankout a raimp neuze kavout un doare all da gas hor raktres da benn. 1000

koumananter a rankomp kaout a-raok fin ar bloavezh 1993 ha dont er-maez bep pemzektez. N'eo ket an aluzenn a c'houlennomp. Ar gwir nemetken da gelaouiñ hor c'henvroidi en o yezh, bep miz, bep pemzektez, bep sizhun, bemdez.

Lena Louarn
Renerez Bremañ

*Nedeleg Laouen
deoc'h holl !
Prof Nedeleg
ar gelaouenn*

Koumanant doubl

Ur prof dispar evit ho mignoned :
ur c'houmanant da v-Bremañ !
180 lur evit 12 niverenn ar bloaz
300 lur evit 2 vloaz koumanant

E! RONAN,
SELL 'TA AR PROF
'M EUS BET GANT
VA MOEREB !

